

Ur wech e oa en ur vro bell (ken pell ma ne veze meneg outañ war gartenn ebet), ur roue trist ha spontus, a veze e-unan o chom, en e balez bras-divent bet savet war lein un dorgenn.

Teodorus a oa e anv, ha ne gare na den na tra, met dre ma rene evel un tirant war e rouantelezh, ne veze ket gwelet liv an eürusted war den abaoe pell a oa.

Gwelet tud disoursi a oa pezh a zisplije ar muiañ d'ar roue-se hep levenez na jourdoul, hag ar soñj

gwelet lod eus e sujidi bout laouen a veze trawalc'h da lakaat anezhañ da vont en egar.

Mont a rae e holl nerzh-korf ha nerzh-spered gantañ da wallgas annezidi e rouantelezh, mantret an holl anezho, ha dre ma oant gwasket gant e gounnar, ne vevent nemet ur vuhez unton, trist ha teñval.

Gwashoc'h a oa : ken bras e oa o glac'har hag o zristidigezh, ma oa pell amzer abaoe m'en doa bet tro da zen ebet er vro da hunvreal, e-giz ma vije bet steuziet hunvreoù pep hini da viken, ha da gentañ-penn reoù Teodorus e-unan.